

3. Salud , o trouien c'hlaz ,  
Ker d'hon Rouanez ,  
Diec'h ma teurvezaz  
Diskenn ken liez !
4. Salud d'ac'h, roc'h huel ,  
He deuz war he fenn  
Iiz hon mamm zantel ,  
D'ann traou , he feunteun.
5. D'ann traou eur vammien skler ,  
Gant tud oc'h eva :  
D'ann ec'h eunn iliz kaer  
Ha tud o'kana :

6. Gant am henti c'houarn bende  
E teu bagadou ,  
Kalz war ho zreid ive  
Dreist ar meneiou.
7. Ann oll a sknul daerou ,  
Ouz ar roc'h stouet ,  
Ann oll ho deuz grason  
El lec'h bepniget.
8. Bet eo ar Vrelonet  
Kentoc'h evit-he,  
Piou, Mari, pa gomzet  
Ouz-hoc'h na zentse ?

## IMPRIMATUR.


Sant-Brieg , ar 26 deiz a viz guengolo , 1875.

## A. CHATTON , vic. gén.

Sant-Brieg. L. Prud'homme , mouler.

## GWERZ

## ANN ITRON VARIA LOURD



1. Eunn deiz a viz c'honevrer  
D'ann heur a greiz-de  
Pa zoun a-uz pep-ke  
Kloc'h ann teir Ave.

## Diskan.

Ave , ave , ave , Maria .  
Ave , ave , ave , Maria !

2. Eur plac'hik iauouank-flamm ,  
Merch eur micherour ,  
A glaske koad d'he mamm  
O vont hed ann dour.

3. Diou wech eunn taol avel  
Pa zozi nebeuta  
Heb na finv geod na del  
A zeu da c'hueza.

4. War roc'h Massabiel  
A zav dirag-hi  
Eur sklerien a well  
Kerkent o lintri.

5. E kreiz ar sklerien  
Na kaera prinsez !  
D'al loar, d'ann heol zoken  
Hi a rafe mez !

6. O welet he zellou ,  
He c'hoarz ken lirzin ,  
Bernadet Soubirou  
A gomez d'ann daoulin.
7. He zae hiz zō gwennoc'h  
Evit lili-han  
Hag he zeien glasoc'h  
Vit ann oabl skleran.

8. War he zreid diou rozen  
Dispar a weler  
Er barados hepken  
Zo bleuniou ken kaer

9. Enn he dora eur rezer ,  
Ranjen aour , gream gwenn  
Hueloc'h pa zeller ,  
Eur wel war he fenn.

10. Kalon ar plac'hik kez  
N'he c'hereiz a zaille  
Hag eunn taol he mouez  
A lavar : Ave.

## II.

1. Abenn eunn tamm amzer  
Ne well ken netra ;  
Hag e tistro d'ar ger  
Gant ar joa vrasa.

2. « Ma mämm' ger, n'ouzoch' ket  
Ouz ar roc'h duze  
Petra 'm euz-me gwelet  
Hire da greiz-de? » —

3. « Ma merc'h paour, trômpet oc'h,  
Diwallit en vad,  
Na iafech'-hu pellec'h  
Aze da glask koad. » —

4. « Ma mamm, na kaer eo-hi!  
Kenta m'he gwelinn  
Me c'houlenno out-hi  
Petra gemenn d'in. »

5. Henvel ouz ar goulmik  
O njal d'ne nez,  
E red c'hoaz ar plac'hik  
Trezeg ar menez.

6. « Itron gaer, me bo ped,  
War ar paper-man,  
Skrievet petra glasket  
O tisken aman. » —

7. « Perag skriya, bugel,  
Chilaouit ma mouez :  
Deut da Vassabiell  
Epad pemzek dez.

8. « Oh ! mar zenfet ouz-in  
Em falez, enn Ee,  
Gant ma mab ha gan-in  
C'houi vo, touez ann Ele:

9. « Na zeut ket hoc'h-unan :  
Me garfa gwelet  
Kalz a re-all aman  
Genoc'h diredet. »

10. Bernadet a zeue  
Bemde gant dodi  
Meur a den koulkskonde  
A re goap oothi.

## III.

11. Kalz a re-all ire,  
Ha bemde muioch',  
Bep mintin he heuille  
Da gichen ar roc'h.

2. Setu-hi, c'hoaz steget  
N hazz ar roc'h huel,

Kredi rafec'h gwelet  
Daoulinet eunn el.

3. Rag ar gened dispar  
A garg a zudi  
Ann env bag ann douar  
A zo dirag-hi.

4. Bizaj ar plac'hik kez  
Splann a lugerne  
Gaut ar sklerder nevez  
He sklerjenne.

5. « Vel-se, pa den al leor  
ENN noz da bara,  
Raktal war ann' douar,  
Ann traou a gaera.

6. Ann dud vad, daouliget  
A zell' gant estouy  
Ha pelhini a bed  
A greiz he galou.

7. « Petri zo c'hoarvezet  
Gen-oc'h, Itron gaer,  
Ma seblantet nec'het?  
Na petra d'ober ? » —

8. « Petri?... d'hoc'h me laro  
Petra zo d'ober :  
Pedi bete r-maro  
Evit peb pech'er. »

9. Ann-deiz kenta goude  
Netra na wetalz :  
Ar plac'hik koulkskonde  
C'hoaz a zistreaz.

10. « Setu ann urz a ran,  
Bet zozi, ma-bugel,  
Red vo, zevel aman  
D'in-me, eur chapel. »

## IV.

1. Hep date Bernadet  
Da di ar person  
A red evit lareti  
Komzou ann Itron.

2. « Deut opa, autre Person  
Evit eun chapel  
A felte d'ana Itron,  
War Massabiell. »

3. « Eur chapel he devo  
Mar lak da vleunian  
Ar spern zec'h zo enô  
Brema daoust d'ar goan. »

4. « Itron, ar velein,  
Araok ma c'lredi,  
A fell d'ez-ho bleun gwenn!  
Er spera o-kreski. »

5. Ar vamm drugarezuz,  
Pa glev kement-ma,  
A vousc'hoarz duduiz  
Hep respont netra.

6. E-pign ouz ar roc'h vraz,  
Dizech'ha goenvet,  
Ar bod-spern a chômaez  
Bleun na daolaz ket!

7. Hogen nag a vurzud  
E Lourd c'hoarvezet !  
Piou a gonto ann dud  
Eno pareet !

8. O klevet ann doare,  
Kalz a gredas krenn  
Oa gauz pez a lare  
Ar verc'h penn-da-benn.

9. N'euz burzud chet c'hoaz  
Ar weach'-na, gwir eo :  
Mes gortozet, warc'hoaz  
Burzud a vezoo.

10. Ar bleunion d'ho mare  
A oenv kreiz ar prad :  
C'houi na cenvet morsé,  
Kalon hon Mamm vad !

## V.

1. Tal ar roc'h ann deiz-se,  
A hep korn ar vro,  
Tud eleiz a zeue  
Prez vraz warnezho.

2. Ann Itron hep dale  
A zav, a gomz flour :  
« Ma merc'h, d'ar feuntezen  
It da eva dour. »

3. Biskoaz mammen, allaz  
Na oa bei eno :  
Nemert fammeu geod, glaz  
Ha mein tro-war-dro.

4. Gant he biz Bernadet  
A ra eunn toulik :  
Kerkent ann dour a red  
Lommik ha lommik.

5. Bepret e kresk ann dour  
Er feunteen nevo :  
Gant-han eur micherour  
En em gav pare.

6. Feunteen a vadelez,  
Oh! nag a glanvour  
Zo bet ac'houdevez  
Iac'heet gant ho tour !

7. Hogen, beteg eno,  
Mari ne doa ket  
Diskullet he hano  
D'he merc'h Bernadet.

8. Bernadet a lare  
A greiz he c'halon :  
« Na klevet me garfe  
Hoc'h hano, Itron ! »

9. « Ma c'hano, plac'hik fur,  
N'anavet ket c'hoaz ?  
Me eo ar Werc'hez pur  
Dibec'h a viskoaz. »

10. Rouanez ann envoù  
A davaz goude ;  
Mes he madelezou  
A greske bemde.

## VI.

1. Fin zo d'ar pemzek deiz,  
Awalc'h, eo brema :  
Gwerc'hez ni oll gand feiz  
Ho trugareka.

2. « Deut oll, deut, a larech',  
Da Vassabiell.  
Mont a rer a bep lech',  
A dost hag a bell. »